

Buhezourien

- William LANDIN
- Alan TUDORET
- Awenn PLOUGOULM (al Lun goude kreisteiz ? = labourat war e/he anal, distanañ ar c'horf, tommañ e vouezh/he mouezh)
- Daniel CARRE (ar Meurzh)
- Fanny CHAUFFIN (al Lun)

Evit

Tud oc'h ober war-dro bugale, krennarded... (kerent, skolaerien-rezed divyezhek...); stummerien.rezed e stummadurioù hir; tud o labourat gant an dud war an oad (buhezourien, klañvdiourien...) ; neb bennak a zo dedennet gant an dañvez.

MET RET EO GOUZOUT BREZHONEG MAT DIJA !

Palioù

- Deskiñ kontañ en ur mod hengounel
- Bezañ gouest da gontañ un istor dirak an holl
- Deskiñ penaos e vez lakaet ar vugale, pe ar stajidi (er stummadurioù hir) da gontañ un istor diwar glevet
- Klevout meur a zoare brezhoneg komzet
- Kompren donoc'h ar sevenadur he deus maget ar c'hontadennoù hengounel ha poueztreuzkas an hengoun dre glevet e brezhoneg
- Sevel ur roll kontadennoù prest da implij.

Pouezus

Pep stajiad-ez a glasko dont gant istorioù (div pe deir) a blij dezhañ/dezhi e brezhoneg evit pinvidikaat anezhe e-pad ar sizhun.

Bep kreisteiz e kinnigo Awenn d'ar stajidi kontañ un istor ganti da vugale ar greizenn dudi (evel he doa kinniget ar bloavezhioù all).

Bep goude kreisteiz ez eio ar stajidi da gontañ o/un istor dirak ar strolladoù all (arabat ankouaat burev ar velestradurezh)

D'ar yaou da noz e vo kinniget ur veilhadek en davarn evit kanañ ha kontañ. Ar stajidi o do c'hoant a vo pedet da gontañ d'ar mare-se.

Atalieroù a vo kinniget bemdez hervez ezhommoù ar stajidi

- Aozañ ur c'helc'h konterien: Penaos ? Evit piv ? Perak ?
- Hengoun dre glevet: Troioù-lavar, divinadelloù, lañsañ/ klozañ ur gontadenn, labourat gant ar pezh zo bet dastumet gant Dastum.
- Tapout fiziañs, merañ al leurenn, pleustriñ war arz ar gaou, labourat e vouezh, labourat war ar c'hwezh pe an anal, c'hoari gant ar publik
- Kontañ er-maez, implijout al lec'h hag ar publik evit diorren arz al liamm.
- Kontañ er skolioù divyezhek, peseurt obererezhioù evit lakaat ar vugale da gontañ
- Sevel abadennoù evit kontañ e brezhoneg, peseurt skouerioù :
- Lec'hioù evit kontañ e brezhoneg. Kontadennoù hiroc'h : ar marvailhoù, kontañ er chadenn ur marvailh hir.
- Tremen eus ur gontadenn dre skrid d'ur gontadenn a veg ?
- Implijout ar c'han e-kerzh ur sorbienn ?

Pazennoù:

Devezh 1 : Lun

Strolladoù evit deskin un istor verr digant ur stummer

Kelc'h konterien : pep stajiad-ez a gont an istor en/he deus choazet pe glevet

Kompren nerzh an hengoun dre glevet : kontañ un istor berr dirak an holl = bilañs ar boelladenn, kuzulioù...(+ fazioù yezh)

Devezh 2 : Meurzh

Kontañ gant Daniel Carré

-Adober ar c'helc'h konterien evel d'al Lun : evezhiadennoù pe kuzulioù gant Daniel

Kontadenn ha kontadenn a zo ; sachañ ha derc'hel an evezh

Brezhoneg ar c'hontadennoù hengounel dre gomz : ur vammenn a-fet yezh evit hiriv.

Kontañ : un doare da zeskiñ komz ouzh an dud ha dirak an dud

Devezh 3 : Merc'her

Mintinvezh: Atalieroù : a bep seurt doare da voutc'hañ ha da glozañ ur gontadenn + troioù-lavar/divinadelloù

Abardaez: Pep stajiad-ez az aio da gontañ e/he istor e pep strollad KEAV

Atalieroù lakaat tout ar pezh zo bet gwelet diouzh beure e pleustr + aozañ ar veilhadek evit tachenn-gampiñ ar vugale

Nozvezh : Kontañ en dachenn-gampiñ dirak ar vugale.

Devezh 4: Yaou

Mintinvezh: Atalieroù + mont d'ar marc'had

Abardaez: Pep stajiad-ez az aio da gontañ e/he istor e pep strollad KEAV => **Bilañs**

Aozañ ar veilhadeg + atalieroù

Nozvezh: Beilhadeg en ostaleri

Devezh 5: Gwener

Mintinvezh: Atalieroù

Abardaez: Pep stajiad-ez az aio da gontañ e/he istor e pep strollad KEAV

Atalieroù pleustriñ

Devezh 6: Sadorn beure Bilañs ar staj

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù e-giz hemañ ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.

